

Selaouit mat,va mignoned,
Chibidi,chibida,tralala,
Selaouit mat,vamignoned,
Ar malheur ganen arruet.

Eun deiz,eta,d'ei 'm eus laret:
"Eur,va dousik,'vimp eureujet ?"
"Ar c'henta posubl,va mignon,
Rak d'eoc'h hepken eo va c'halon."

Setu c'hoant d'in da zimezi
Ha da lakat eur c'hreg em zi.

Setu skrivet an embannou,
Ha me eürus 'vel eun aotrou.

Buan ar c'helou ' zo brudet
E raen lagadig d'ar merched
A-benn teir sizun pe ouspenn
E kavis trizek 'vit dousen

Met,allas,allas,mignoned!
An traou buan a zo freuzet

Kenta baz-valan 'laras d'in:
"Sur out eus Soazig ar vilin.

Eun all ' zo deut war va roudou
En deus siret d'in va boutou!

Hag ar c'helou-ze,ha raktal,
Lakas va c'halon da dridal

Ar c'henta bisac'h,mignoned
Soazig ken brao d'in deus roet

Bihan na bras Soazig n'eo ket
Koantoc'h 'viti n'eus ket er bed.

Hag an dud,truez ouzin-me
A lavar oun eul lost-leue.

Pa vez rannet he bleo melen
Neuze,avat,eo eur fleuren.

Lagadig glas he deus ive,
Ha sellet brao 'rae ouzin-me.